

LEZ-BREIZ.

War don : Pa oa potr Lez-Breiz.... XII er Barzaz-Breiz.

Koad-ar-Ster ha Lezo-Bre zo bet
Diwar-benn eunn emgann n'em glevet. (bis.)

Done da rei d'ez-he heaj vat,
Ha d'ar re chomo ger kelo mat ! (bis.)

Ann Otro Koad-ar-Ster a lare
War bave Treger pa zigouee : (bis.)

« Dematac'h oll ha joa er ger-man !
» Ann Otro Lezo-Bre, pelec'h-man ? » (bis.)

— Mar g-eo Lezo-Bre a c'houlennet,
Otro Koad-ar-Ster, ouzin komzet. (bis.)

— Dalec'h aze eul lizer, Lezo-Bre,
Digaset d'id a beurz ar Roue. (bis.)

— Mar g-eo gand ar Roue skrivet d'in
Reit-han d'in ta evit m'hel lenninn. (bis.)

— Disteran soudard zo em banden
N'astenufe ked he zorn d'id, azen. (bis.)

— Mar g-on me eunn azen, a dra zur,
« Ne n-on ket kement-se dre natur : (bis.)

» Ne n-on ked eunn azen dre natur ;
» Rak ma zad oa brudet vel d'en fur. (bis.)

» Mar n'hoc'h euz ket ma zad anavet
» Bremezonig he vab anavet. (bis.)

» Dibret, floec'hik, ma ankae gwenn ;
» Leket eur brid arc'hant war he benn. (bis.)

» Hag eunn dibr silaouret enn melen,
» Ma vo brav da zongen eunn azen, (bis.)

» Ha pa gouefe ma marc'h pep kamed,
» Me renk monet fenoz da Wened. » (bis.)

Ann Otro Lezo-Bre a lare
Da Zantez-Anna pa zigouee : (bis.)

« Enn triouec'h emgann e'h on-me bet :
» Heman all vo d'in ann nantekved ; (bis.)

» Ma nantekved ha ma divean :
» Hen lako ma c'balon da rannan. (bis.)

» Me rei d'ach, o Gwerc'hez ma mamm ger,
» Seiz gwiskad evid ho seiz oter. » (bis.)

Ne oa ked he c'hir peur-lavaret
M'e deuz ar Werc'hez outan komzet : (bis.)

« Ho ! ia, te zo hepret ma map me ;
» Kerz ta buan d'ar ger, Lezo-Bre : (bis.)

» Lezo-Bre, kerz ta d'ar ger buan,
» Ha ne gas den genit d'ann emgann ; (bis.)

» Na gas den genit d'ann emgann-ze
» Nemed da floec'hik bian a ve. » (bis.)

Ann Otro Koad-ar-Ster a laraz
D'ann Otro Lezo-Bre p'her gwelaz : (bis.)

« N'oc'h ked enn ho pro eunn den karet
» Pa ne n-eo deut genac'h soudardet. » (bis.)

A hoan e oa he c'hir peur-laret
Ma oa Koad-ar-Ster enon koueet, (bis.)

Gand anter kant euz he zourdardet,
Hag anter kant all a oa tec'het. (bis.)

Mes benn eiz te varlec'h kement-se
Oa deut eul lizer da Lezo-Bre. (bis.)

— Lezo-Bre sell eul lizer aze
Digaset d'id a beurz ar Roue. (bis.)

— Mar g-eo gand ar Roue skrivet d'in
Daman nean evit m'hel lenninn. (bis.)

« Hen lar d'ac'h, eme ar floec'h bian,
» Monet da c'hoari gand he Vorian. » (bis.)

— Disket d'in-me ta, floec'hik bian,
Stum hag ardo brezel he Vorian. (bis.)

— Koment-se d'ac'h ne lavarinn ket
Gand aon e vijenn diskuliet. (bis.)

— Ken gwir ha m'euz maro da dremen,
Floec'hik, n'hel lavarinn biryiken. (bis.)

— Ar Morian dal ma vo deut er zal
« A dolo he zillad traou raktal : (bis.)

» Groet vel-se ; ha pa rei sail enn er
» Leket ho kleve d'hen digemer ; (bis.)

» Kerkent a m'henn gwelfet dic'houinan
» Tolet prim dour biuniget gantan ; (bis.)

» Pa c'houlenno genac'h diskouizan,
» Ne roet ked a ziskouiz d'ean ; (bis.)

» Rag henez en deuz gantan lonzou
» Vent ket pell vit gwelat gouliou. » (bis.)

Velkent ar Morian a lavare
D'ann Otro Lezo-Bre hen gwaske : (bis.)

« Otro Lezo-Bre mar em c'haret
» Eunn tammik diskouiz d'in a rofet. » (bis.)

— Ho ! ne n-eo ket evit diskouizan
Ec'h omp deut hon daou d'ar c'hoari-man. (bis.)

Gonde ar Roue oll-c'hlac'haret
Da Lezo-Bre en deuz lavaret : (bis.)

« Lazet t-euz diwaller ma bue :
» Genin em falez e chomi-te. » (bis.)

— Genac'h enn ho palez chominn ket :
Ma mamm zo neve intanvezet. (bis.)